

KERFONS-PLOUBEZR

ar don : *Kroaz an hent (Barzaz-Breiz)*

I

— « Tud iacouank, ha c'houi a garfe
 « Lavaret d'in, enn han' Doue,
 « Pe me 'zo tost pe na n-on ket
 « Euz chapel Kerfons binniget ? » —
 — « Ma den mad, ni ive a ia
 « Trezeg Kerfons da bardouna :
 « Mar keret, c'h efomp war eun dro,
 « Gand ann hent nemet distroïo.
 « Pa vefet erru, e welfet
 « Na n-eo ket eneb gwir brudet :
 « C'houec'h leo war dro n'euz ket ken kaer
 « Ha chapel Kerfons enn Ploubezr. » —

II

— « Beacher, o tont war ho kiz,
 « Deut enn ti d'ober eun diskuiz ;
 « Gand ho kwialenn marellet,
 « Pelec'h o pardouna c'h oc'h bet ? » —
 — « O pardouna on bet, itron,
 « N'eur chapel, en bro Lan-Huon,
 « Vit ma flac'hik a zo du-man,
 « Gand ann darsien vraz o krenan.
 « Dimerc'her e deuz laret d'in :
 « Ma zadik kez, sentet ouz-in ;
 « Disul da Gerfons ac'h efet,
 « Hag an darsien 'vezo torret. »
 « N'oun ket ha 'meuz bet ma mennad :
 « Pedet 'meuz 'vel ma bed eun tad ! » —
 — « Da c'hortez koan ha c'houi 'larfe
 « Petra hoc'h euz gwelet du-ze ? » —
 — « Eur chapelik euz ar c'haeran,
 « Meulet gant ann holl a-unan ;
 « Enn-hi treo da welet e-leiz :
 « Gwech-all e labouret enn Breiz !
 « Kristenien bodet o pedi,
 « A-galon, ar Werc'hez Vari :
 « Pleubeziz a zo tud a fe
 « A c'houe enori Doue !
 « Mez ar pez a oa a vraoan
 « Eo, a dra zur, kement-man :
 « Et e oa e-meaz ar belek,
 « Ann holl dud d'ar ger o redek,
 « Daou zen iacouank pe 'meuz gwelet
 « Dirag ar Werc'hez daoulinet,
 « Dorn ouz dorn harpet penn ouz penn,
 « Hag hi o pedi evel-hen :
 — « Gwerc'hez Kerfons, o mamm dener,
 « Ni ho ped d'ober digemer,
 « Digemer mad da eur bedenn
 « A reomp dirag ho skeudenn.
 « N'hon c'halon 'zo gwir garante,
 « En eil e kenver egile,
 « Ha setu c'h omp deut d'ho pedi
 « Da skuill ho pennoz e-war-n-hi !

III

— « Ivonaik, na c'honi 'zo klanv ?
 « Trement neve-amzer, hanv,
 « N'oc'h ket bet c'hoaz gwelet er vro
 « Eur wech zoken er pardonio.
 « Gwech-all e kement jolori
 « Leur-neve, ebat ha c'hoari,
 « Mistr ha skanv, bepret ar gentan
 « O tansal 'kavet Ivonan » —
 — « Bezet dinec'h, klanv me na n-on,
 « A gori, kennebeut a galon,
 « Mes o tansal 'vin ket gwelet,
 « Ken a vo devez ma eured !
 « E pardon Kerfons, warlene,
 « Lomik a Ger-Izel ha me,

de diwean euz ar bed, me 'vo gan-hac'h war an douar. »

Dre ar c'homzou-ze, Hon Zalver a roe da anaout e vije gant an ebetel ha gant ar re a vije war ho lerc'h, goude ho maro ; rag ze 'zo skler, an ebetel na helle ket chom houan en-beo, war an douar, beteg ar varn diwean.

Ha piou 'zo breman war lerc'h an ebetel ? 'vel ouzoch, Hon tad santel ar pab, 'zo azeet war gador Sant Per, an eskibien hanvet gant ar pab, ar veleien hanvet gant an eskibien.

Red eo senti out-he pen eo gwir Hon Zalver eman gant-he. Gant-he 'man ar wirione difazi, rag Hon Zalver, o vean Mab Doue, na hell nag en em fazia, na fazia ar re-all.

Ha daout hag ar wirione c'hall bean ive gant ar Brotestanted ?

— N'hall ket, rag ho fastored n'int ket deut war lerc'h ann ebetel. N'int ket bet galvet gant eskibien galvet ho-unan gant eskibien a oa en ho rok, ha ze, a rum da rum, beteg an ebetel.

Kement-se 'zo gwir evit ar veleien katolik, nan evid ar bastored protestant. Er penn kentan euz ar re-man a gaver ken nemet eur c'hoz manac'h, Luther he hano, nac'het gant-ha he reolen-manac'h, dre ma oa lorc'huz he spered ha brein he galon.

Gant-se, 'vid bean salvet, sentomp bepred ouz Hon Zalver hag ouz an Iliz gatolik, ha greomp skouarn vouzar ouz ar protestanted hag ouz kement hini a garfe hon distrei diwar hent ar gwir fe, a zo ive hent ar zilvidigez.

AN NEVE-AMZER

Arru eo ann neve-amzer,
 Gant-han levezet-ha sklerder ;
 Tolet an neuz ar goanv kalet
 He vantel wen a erc'h skornet.

Arru eo am neve-amzer,
 Bokedou, 'leiz ar parkeier ;
 Er gwe deliou, hag, enn ho mesk,
 Evnigou koant o kana fresk.

Evnigou ann neve-amzer,
 O teurel ho c'han d'ho C'hrouer,
 O laret, enn ho lezigou,
 Da Zoue ho meuleudiou.

Sklerijenn ann neve-amzer,
 Laka laouen al labourer ;
 Setu enn he brajou isot dru,
 Hag heol war lerc'h ar c'houmoul du.

Paz arru ann neve-amzer,
 E c'hoarz ar mor d'ar pesketer ;
 Mui da sponta rag ar goagou,
 A vruzun, er goanv, ar bagou.

Ar barz, 'pad ann neve-amzer,
 A zilez telen ar c'hwervder,
 N'he galon, e teu levezet,
 Na gano ken tristidigez.

Paz-arru ann neve-amzer,
 Peb-unan ac'h adden seder,
 Hag ar Spi adsav 'n he galon
 D'ann nep a zo euz gwir Vreton.

JAFFRENOU.

PARDON SANT JORJ EN PLEUVIAN

Disul, ar bemp war-n-ugent euz ar miz ebrel, oa gouel en parrouz Pleuvian. Diouz ar heure ann amzer oa karget ha koummoulek, ha Pleuvianiz a gave d'he e vije glao. Mez sant Jorj a zelle ouz he vignoned, ha, da zeg heur, e tigoraz ann ofern bred : an iliz en em gavaz re vihan da zigemer an holl dud euz ar barrouz. An otro Chapelle, person Kemperven a rea ar pardon ha sonerien ar skol Landreger, renet gant an otro Goasdoue, eur mestr-soner evit-han da vean iacouank, a lakea ar pardon bravoc'h c'hoaz.

PLERNEUF. — Le pardon de Plerneuf, le plus civil que religieux, a lieu tous les dimanches de la Quasimodo : de là dans le pays le nom de *pardon de la Quasimodo*. On dit des amateurs de pardons, celui de Plerneuf occupe le premier rang à cause de son importance. Exception est faite pour le pardon de Brest, de Châtelaudren.

Cette année, beaucoup de barraques, voire même deux carroussels.

Toute l'après-midi, foule considérable de la jeunesse des communes environnantes.

Beaucoup de briochins. A vrai dire, Châtelaudren a toujours le record pour les fêtes de Plerneuf. On évalue à au moins trois cents personnes descendues au train de 3 heures du soir. Excellente journée pour les débitants du bourg.

Une bonne note : à 9 heures, tout était à peu près rentré dans le calme.

QUINTIN. — Marché du 27 avril.

Les 100 kilos : froment 1^{re} qualité : 21 fr. ; blé noir : 44 fr. 50 ; avoine, 15 fr. ; seigle : 14 fr. ; pommes de terre : 4 fr. 50 ; les 1,000 fagots : paille, 48 fr. ; œufs, la douzaine, 0 fr. 50 ; beurre salé, le kilo : 4 fr. 80 ; mouton, le kilo sur pied : 0 fr. 60 ; veau : 0 fr. 60.
Grande quantité de chevaux.

QUINTIN. — Fête de Notre-Dame de Délivrance.

— A Quintin, le dimanche, 2 mai, fête de Notre-Dame de Délivrance. La fête sera présidée par M. l'abbé Robert, docteur en théologie, Supérieur de l'école Saint-Joseph, qui prêchera à la grand-messe. A onze heures et demie, une dernière messe sera dite pour les pèlerins.

Les vêpres seront chantées à trois heures et suivies de la procession solennelle de la ceinture de la Sainte Vierge.

Après les vêpres et le salut du Saint Sacrement, la sainte relique sera offerte à la vénération des fidèles.

A huit heures, illumination de la ville, de la vallée du Gouët et des côteaux voisins.

A l'église, jusqu'à 10 heures, cantiques et prières en l'honneur de Notre-Dame de Délivrance.

En vente à la librairie Bazouge, à Dinan.

L'ALCOOLISME ET SES CONSÉQUENCES

par le Docteur **Ch. Pépin.**

Mémoire récompensé par l'Académie de Médecine.

KERFONS-PLOUBEZR

War don : *Kroaz an hent (Barsaz-Breiz)*

I

- « Tud iaouank, ha c'houi a garfe
« Lavaret d'in, enn han' Doue,
« Pe me 'zo tost pe na n-on ket
« Euz chapel Kerfons binniget ? » —
- « Ma den mad, ni ive a ia
« 'Trezeg Kerfons da bardouna :
« Mar keret, c'h e fomp war eun dro,
« Gand ann hent nemet distroio.
- « Pa vefet erru, e welfet
« Na n-eo ket eneb gwir brudet :
« C'houec'h leo war dro n'euz ket ken kaer
« Ha chapel Kerfons enn Ploubezr. » —

II

- « Beacher, o font war ho kiz,
« Deut enn ti d'ober eun diskuiz ;
« Gand ho kwialenn marellet,
« Pelec'h o pardouna c'h oc'h bet ? » —

« Dirag ar Werc'hez 'meump touet,
« En em garet gand lealdet.

« Eiz miz 'zo da zoudard 'man et,
« Ha ken 'vo d'ar ger distroet,
« Me 'vo ouz hen gortoz aman
« O pedi Doue evit-han ! —

IV

« Achu gand Lomik he amzer,
« Distro e 'nn he barrouz Ploubezr,
« Kavet he Ivona gant-han,
« Leal, 'vel o tispertian.

« Ann devez m'int bet eureujet,
« Evel m'ho devoa hen touet,
« Da Gerfons, ec'h int et timad
« Da drugarekaat ho mam vad,
« Goude, int distroet d'ar ger,
« Laouen, ev aruz ha seder,
« Enn ho c'halon diou garante
« Ho h'ni, hini mam Doue !

GAB LISKILDREY.

10 ebrél 1897.

AR FE

Red eo kredi ha kredi er gwir Iliz

Hon Zalver, pa deuz war an douar, a laraz d'ar Judevien : « Ar re a gredo a vo zalvet ; ar re na gredo ket a vo barnet. »

Evit diskouel e oa ar wirione gant-han ha rei he gomzo da wir, e reaz kalz a vuzudo : ar gweled a roaz d'ar re zall, ar prezek d'ar re vud, ar iec'hed d'ar re glanv, ha zoken ar vue d'ar re varo ; eun de, e pevez n'ousped mil den gant eur bara hag eur peskik bennag ; eun de-all, e oe gwelet o kerzet war ar mor evel war an douar. Laret an nevoa d'ar Judevien : « Mervel a rin hag, an drede de, e teuin beoc'hadre », ha kement-se a c'hoarvez, a-well d'an holl, evel m'an nevoa laret, ha daoust d'eur mean ponner o stankan he ve ha da zoudarded o viret anehan.

Dre an holl vuzudo-ze, Hon Zalver en euz diskouezet splann e oa Mab Doue hag e oa gwir kement a lare, red mad d'an holl kredi enn-Han ha senti out-Han hag ouz ar re a zo galvet gant-Han da zerc'hel he lec'h war an douar.

Ar re gentan a oe galvet gant Hon Zalver da zerc'hel he lec'h war an douar oe an ebesterol. Hon Zalver a gemennaz d'he prezek he aviell dre ar bed-holl, en eur laret : « Ac'hann d'an de diwean euz ar bed, me 'vo gan-hac'h war an douar. »

Dre ar c'homzou-ze, Hon Zalver a roe da anaout e vije gant an ebesterol ha gant ar re a vije war ho lerc'h, goude ho maro ; rag ze 'zo skler, an ebesterol na helle ket chom ho-unan en-beo, war an douar, beteg ar varn diwean.

Ha piou 'zo breman war lerc'h an ebesterol ? 'vel ouzoch, Hon tad santel ar pab, 'zo azeet war gador Sant Per, an eskibien hanvet gant ar pab, ar veleien hanvet gant an eskibien.

Red eo senti out-he pen eo gwir Hon Zalver eman gant-he. Gant-he 'man ar wirione difazi, rag Hon Zalver, o vean Mab Doue, na hell nag en em fazia, na fazia ar re-all.

Ha daoust hag ar wirione c'hall bean ive gant ar Protestant ?

— N'hall ket, rag ho fastored n'int ket deut war lerc'h ann ebesterol. N'int ket bet galvet gant eskibien galvet ho-unan gant eskibien a oa en ho rok, ha ze, a rum da rum, beteg an ebesterol.

Kement-se 'zo gwir evit ar veleien katolik, nan evid ar bastored protestant. Er penn kentan euz ar re-man na gaver ken nemet eur